

FIN HA FOLL!

Louarnig



dae d'ar
sonerezh

Sonerezh straed
BRO-JAMAICA



Labour dorn
GRA DA gKAZOO

P.3

SANDRINE HAG
AL LOGOD !

P.4, 5, 6

Paotr Louarn

P.8-9

AR SOUND SYSTEM

C'HOARIOÙ P.7

P.13-14

Fard da venveg sonerezh da-UNAN !

P.12

Naggeneen

P.10

MEURIAD

Titeuf P.13

"Lakaat a ran asambles notennoù
ez eus karantez etrezo."

Wolfgang Amadeus Mozart



Un tamm
preder...

keit-vimp-bev.com/fr/louarnig

Mensuel/miziek - N°15

Even. Juin 20

5 € an niv. / 5 € le

60 € ar bloaz / 60 € l'ann

Niv. CPPAP : 0519 G 806

Embannet gant / édité par

KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Rener an Embann

Dir de Publication

Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhier / Coordinatrice

Maketenn / Maquette

Camille Argouarc'h

camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par

SOFAG, BP21 - 29590 AR FAO

Skeudennoù a zo implijet gant

Aotre-Implijout Creative Commons

Embannet gant skoaz

Avec le soutien de



EMAN FEST AR SONEREZH ■ TOSAAAT !



CC-2.0-BY-dcaseyphoto



Tenn ur poltred ouzhit pe ouzh ur mignon
pe ur vignonez dit (pe c'hoazh ouzh
meur a hini) o seniñ
sonerezh er straed pe e lec'h all.
Kas da boltred deomp hag e resevi ur
bladenn gant Krismenn pe profigoù all !



Kas da
boltred
gant da anv
ha da
chomlec'h da :

Louarnig
22 grand rue
29520 LAZ

pe camille.kvb@orange.fr

Sandrine,
 E-barzh hon, ti ez eus bet logod
 o furchal e-pad ar moz, ha
 kuzh a laouen war o lerc'h!
 Lakat hon eus stakerioù gant
 tamm-oi fourmaj lipous, met
 logodenn ebet tapet! Neuze hon
 gwelet e oa bet krignet (ha tost
 debret en e beg) un tamm
 soavon war da ar gegin! Ha
 gant un tammig soavon war
 ar staker, hag e oa bet tapet ul
 logodenn a-lemm ar fin!
 Souezhet-mik e oarbet; perak e
 c'hellont al logod bezañ sachet
 gant ar soavon ha dreist-holl
 diou hep bezañ klask?
 Ma c'hellit respont den.
 Grugarez en a-raok.

Pauline
 Pont ar Veurgenn



Lizher gant Pauline



Mersi
 dit Pauline
 evit bezañ kontet an
 darvoud-se deomp !

Gwir eo n'eo ket yac'h kaout logod en ti :
 tammoù kaoc'h ha staotadennoù a laoskont war o
 lerc'h, ha zoken war ar boued. Gallout a reont reiñ
 deomp ur c'hleñved dre o staotadennoù : al leptispiroz.
 An dud, ar c'hezeg hag ar chas a c'hell tapout ar
 c'hleñved-mañ, unan a c'hell bezañ dañjerus-tre. Bep taol
 ma kempenner loj ul logodenn wenn eo furoc'h gwiskañ
 manegoù, gwalc'hiñ e zaouarn da-heul ha klask chom hep
 pokat dezhi !


Krignat a ra al logod kement tamm boued en em gav war
 o hent, zoken traoù n'int ket lipous evel soavon, peg, koar...
 Posupl eo e vije bet plijet al logodenn gant stumm ha c'hwezh
 ar soavon dre m'he deus kavet se gwelloc'h eget debriñ fourmaj !
 Ha tapet eo bet abalamour m'eo ur beg lipous !

Toksik eo ar soavon abalamour dezhañ bezañ spoueek hag
 hegus evit ar c'hroc'hen. Hervez ment an tamm lonket e
 c'hell bezañ dañjerus pe get, ha dreist-holl ma vez
 lonket dour war-lerc'h rak ar spoum o tont deus
 ar soavon a c'hell mougañ al loenig.
 Hervezon n'he deus ket da logodenn
 debret un tamm bras a soavon, ha
 n'he deus ket evet dour war-
 lerc'h !

Ken ar wech all !

Te ivez, kas da dresadenn
 ha da c'houlenn da :
camille.kvb@orange.fr
 pe dre lizher da :
 Louarnig, Keit Vimp bev,
 22 grand rue,
 29520 Laz

SKEUDENN AR MIZ



Hanter rod-avel,
 hanter pezh arzel

Setu ur raktres ijinet
 gant Amerikaned
 a-benn gounit energiezh
 a-drugarez d'an avel.
 Ur park plantennoù
 geot 55 metrad uhelder
 anezho hag a ro tredan
 en diabarzh a-drugarez
 da traoùigoù o frotin
 kenetrezo.
 Daoust dezho bezañ e
 plastik, e tennont da
 blantennou,
 ne sonj ket dit ?
 Kinniget eo bet da
 gerbenn Emirelezhioù
 Arab Unanet.
 Kae da welet muioc'h a
 fotoioù war ya-ouank.com !




PAOL?

UR PAKAD
EVIPOUT!

DIN DA
C'HOARI.

EVEL MA
LAVARONT E
TOP CHEF:

"PENN-DA-
BENN,
PERC'HEL A
RAIMP PENN!"



WAR AR STERN, UN
DRA BENNAK ANAT
(DIN D'AN NEBELTAD).

GWISKAMANT MA
ZUPENN MUIAR-KARET,
UL LOUARN A-ZOARE:
FOX-MAN.

PA SOñJAN,
UN DARYOUD FOLL PENN-DA-
BENN AN HINI EO,
MA C'HOARVEZFE EN UR FILM
NE VEFE DEN EVIT KREDIñ.

GWASHOC'H E C'HELLJE
BEZAñ BET!

"KABITEN
HOUIDIG"



DRE ZARYOUD VIJE
EVIT GWIR?
GELLET MIJE DIBAB UL
LOEN ALL.

"DREIST
RAZH-POUR"?

"OPALA! SETU AR
BROC'H-GWADEK!"



BREMAÑ E OUZER ABALAM-
OUR DA BETRA NE WELER
MORSE UN DREISTHAROZ O
LAKAAT E WISKAMANT !



GWELLOCH 'VO OBER
HEP AN ARM-TAN A ZO
GANT FOX-MAN.



... UR VOMBE-
ZENN-LIV EN
E BLAS.

PLUJUSOCH !

HAG AR PEP CHEUCHAÑ :
UL LOGO "PAOTR-LOUARN"
GRAET GANT UR MAEN-TOUCH !



MALL ZO WARNON ! SPERED AL
LOUARN A FELL DEZHAÑ DONT ER-MAEZ !

AR GALLOUDOÙ A ZLEFE DONT
WAR-WEL DRE MA TEU MA ADRENALIN.

RET 'VO DIN PLEUSTRIÑ A-BENN
MESTRONIAÑ AN DRA-SE.

DRES EVEL
MA RA HULK.



MOD-KOZH
HAG EEUN.
ME 'GAU DIN
ON CHIK !



A ! O VONT DA
ZISONTAL 'DAN :
'KEN KAZ E TEUFE
MAMMIG.



PENN-KI
EBET.

MAT.



BEZ' EMAÑ MA DS GANIN,
A-BENN TEUREL PLED
OUZH AN TORFEDOÙ HEP
DIN KAVOUT HIR MA
AMZER...

DAO D'AR C'HREIZ-
KER, STRAED
SANT-MIKAEL.

MA C'HELLAN DONT
DA VEZAÑ UR PAOL
GWELLOC'H...

... E C'HELLAN MOARVAT
DONT DA VEZAÑ UR
JUSTSOUR REIZH
IVEZ.

MA TEUAN A-BENN,
E CHOMO C'HOAZH
(UN DRA BENNAK)
DA GAVOUT :
UN ANV DIN !

DA VEZAÑ KENDALC'HET.

L. LEFEVRE

C'HOARIOÙ


YEAH!


KEMENADENN GUZH

« S                              L. »

Victor Hugo



Dit da zivinout
petra a oa soñj
ar barzh
Victor Hugo
diwar-benn ar
sonerezh.
Hag a-du out
gantañ ?

A: 
J: 

N: 
O: 
D: 

T: 
E: 
U: 

G: 
Z: 
R: 

H: 
E: 

7 DIFORC'H

7 diforc'h zo etre
an div skeudenn-se.
Ha kavout a ri
anezhe ?



Len ar respontoù
er melezour !

RESPONTOÙ :
Ar c'hoblad er foñs
Troed ar gouvioñs
Pegunioù ar gitar
Bijsoù ar gouvioñs
Penn ar saksofon
Zenklenn paotr ar gitar
Botù paotr ar saksofon

E Pelec'h 'ta ?

Bro-Jamaika

KINGSTON



SoUnd

SONEREZH

D'ar 21 a viz Even e c'hell an dud e Bro-C'hall mont da seniñ ha **selaou sonerezh er-maez** evit lidañ ar sonerezh ha deiz hirañ ar bloaz (deiz an hañv). Seniñ sonerezh er straed, el lec'hioù foran, a oa bet kroget e Bro-Jamaika er bloavezhioù 1950. Moarvat 'teus klevet komz eus **Bob Marley** dija ? Ur c'haner **reggae** mil-vrudet. **Bob Marley** n'eo ken nemet unan e-touez an holl dud e Jamaika a vefe barrek war ar c'han ha war ar seniñ.

D'ar c'houlz-se e veze ret d'an dud paeañ a-benn mont da selaou abadennoù sonerezh, **Jazz** dreist-holl. Ur bern tud e **Jamaika** a oa re baour evit se hag ar « **sound systems** » pe « doareoù da gaout son » a oa an doare marc'hadmatañ dezho da selaou sonerezh, ouzhpenn d'ar radio.

Ur seurt **moger a uhelgomzerioù** a veze staliet er-maez, un daol gant ul lenner-pladennoù e-kichen, ur « **selector** » (un den) a zibabe an tonioù da lakaat, ha **dao d'ar sonerezh !** E-pad an dibennoù-sizhun e veze lakaet sonerezh **betek ma savfe an heol** an deiz war-lerc'h ! Ul lec'h a-zoare e oa evit **daremprediñ** gant ar re all ha **kaout plijadur** asambles. Sonerezh a bep seurt a oa bet ganet d'ar c'houlz-se : ar **ska**, ar **rock steady** hag ar **reggae** evel-just, **goustadikoc'h e lusk.**

Gant ar sonerezhioù **hengounel** eo bet **levezonet** an holl re-se.

Mennozh ar « **sound system** » a vez kavet ouzhpenn e **Jamaika** en deiz a-hiziv, dreist-holl e karterioù ar c'herioù bras. Ar spered-se a c'heller kavout er straed d'an 21 a viz Even.

A-wechoù eo ken kreñv ar sonerezh ma santez ar **skinoù** en da gof ! Diwall memestra da chom hep selaou sonerezh kreñv e-pad pell : **prizius** eo da zivskouarn.



Bugale Bro-Jamaika er bloavezhioù 60 : troet gant ar sonerezh int !



Setu ar « **selector** » hag ar **bep**

« Pladennoù deus ar c'houlz-se « 33 tours » pe « 45 tours » a vez graet deusouto.




Ul lenner-pladennoù-du a-vremañ =>




System


er-maez !




Dañserien sonerezh Ska



» o lakaat ar sonerezh zour en e gichen.



Sound-systemoù all er bed






Poubellenoù hag a ya d'ober uhelgomezrioù, nag ur mennozh dibar ! Hag ouzhpenn-se e vez degaset an tredan gant energiezh an heol ! (Stadoù-Unanet)



Ar paotrig-mañ en deus staget pep tra war e garrigel... ! (Stadoù-Unanet)



Deuet eo belo ar paotr-mañ da vezañ ur sound-system o ruilhal ! (Stadoù-Unanet)



Ha te, mont a ri da gampiñ 'kerzh an hañv ?

YEAH!

Kreizennoù vakañsoù 2015 Otieüs de vacances

5-12 vloaz






Séjours de vacances en breton et en gallo



Lak' da anv !

<http://camps-breton-gallo.ubapar.org>

KLASK



titeuf

ar gouel

EVIT AOZAN GOUEL AR C'HLAS O DEUS KEMERET PERZH AN HOLL...



AR GWIR A OA DA ZEGAS TRESADENNOÙ EVIT KINKLAN AR C'HLAS.




PE SKRITELLOÙ...



EVIT AOZAN BITRAKOÙ A BEP SEURT...




A-BENN AR FIN HON EUS GRAET AR GOUEL E PORZH AR SKOL...



Tennet eus « Kenô Bed Kriz »
www.b-heol.com

BANNOÙ-HEOL

DIVINADELL



Daou houad zo a-dreñv
d'un houad, ha daou
houad zo dirak un houad.
Un houad zo e kreiz.
Pet houad a zo en holl ?


KRAK HA BERR

Traouigoù pe
titouroù fentus !

Dit da ginnig ivez !
Kas ur postel da
camille.kvb@orange.fr

FEST AR SONEREZH

E Bro-Suis e
e pad fest ar
Sonerezh
tri devezh ha
nozvezh !



PETRA 'WELEZ ?



Daou vizaj peotramant
ur pod-bleunioù ?

SOUEZHUSAAT KAN



Setu un evn-lourenn, ul labous
gouest da ganañ en ur mod
souezhus-kenañ !
Kae da selaou anezhañ war ar
rouedad ! An « oiseau-lyre » a vez
graet anezhañ e galleg.

E SAOZNEG

« I feel like a
lemon... »



En em santout a ran
evel ur sitroñs !
(Ma-unan en em santan)

YEZH AR SINOÙ

« N'em eus ket
komprenet »



SUDOKU

5				4	
		4			6
3		2			
			6		3
6					
	5				1

C'HA C'HA C'HA !



Daou vugel zo o kaozeal :

_ 3 miz zo e oa kroget ma
breur bihan da gerzhout.

_ Ma ! Pell e tle bezañ hiziv !